

YF_0000 - Ar Hogig Yaouank

Galv

O ni a zo daou gañfard brao hag on-eus bet baleet
Dre gement lec'h a dremenom e zañsom gand ar merc'hed

Dañsal a reom gand ar re goant ablamour e blijont deom-ni
Dañsal a reom gand ar re vil abalamour d'o hontantiñ

Gavotenn

Me am-boea eur hogig yaouank oa du-mañ ganeom-ni
a oa kroget da ganañ med bremañ ne ra mui.

Hag eun nozvez goude goan oa deut eur sonj en e benn
Me a renk mond en noz-mañ war zigarez pourmen

Me a renk ober eur bale eun droiad war ar mez
Da glask he merh Perinaig digand an intanvez

Pa 'm-eus tapet an ano Yann Gogig evid partaj
Me renk kaoud eur barrez da gomañs ma menaj

Perinaig, merh intanvez, honnez a zo d'am grad
Kanerez ha danserez, brilliant he daoulagad

Noz vad deoh-c'hwi intanvez, setu me deut espres
Da houl' ha c'hwi rof' ho merh da hanter-tiegez (da houlenn ha c'hwi a rofe)

Ma merh-me a zo abredig evid eur bloaz pe zaou c'hoaz
Mar d'eo kontant ar bugel, me ne ran ket a gas

Kousket eo e-barz he gwele, penn an traon deuz an ti
Mond a ran da vond d'he havoud evid goulenn diganti

Arsa ma merh emezi, din-me a lavarfe
C'hwi a vefe kontant paourig da gaoud eur pried

Oh ya sur, mamm emezi, serten me vo kontant (serten = galleg certain)
Deuz a greiz ma halon, da gaoud eur paotr yaouank

Mar d'eo kaner ha danser hag eur paotr dilikad (dilikad = galleg délicat)
Neuze am-eus esperañs d'ober tiegez mad

Neuze ar paotr yaouank-mañ a oa joaius ha gae
Hag a zistroas d'ar ger, war an hent e kane

Noz vad dit-te Yann Gogig, te a zo bet o vale
Eun tammig emhout diwezat oh annonz dond d'an deiz

Neuze e tistroez ouzin, gand eur aer da c'hoarzin
Ma 'z eo gwir on-me Gogig, te a zo eul louarn fin

Te a pefe ar vadelez da vond bremañ raktal
Da annonz ma dimezi beteg ar prospital

Ar c'hoarz war va muzellou, pa n'on ket evid mired
Ya ma mignon emezin me re se ma ret ket (me a re se ma ne refet ket)

Oh ya me yae evidoh, beteg ar prospital
Peogwir merh an intanvez, evidoh n'eo ket fall

Noz vad deoh aotrou person, setu me deut espres
Da houd ha c'hwi a zimefe eur hog hag e boulez (houd = housoud , poulez = yar)

Neuze e responte din kazi en eur c'hoarzin
Antreet e-barz ar zal, kemer eur banne gwin

Troet mad ez out bepred da lared ar gevier
N'am-eus ket klevet biskoaz, e veze dimezet ar yer

Excus ganeoh e houlenan, m'am-eus droug-komzet (var: Eskuzit aotrou person m'am-eus droug-parlantet)
Maleur eo d'an dud yaouank pere 'zo lesanvet

Ar re a barlantan deoh a zo daou zen yaouank
O houlenne en em unani o diou galon gontant

Ar re a barlantan deoh a zo gour ha femelen
O houlenne bezan staget gand ar memez chadenn

Unan a zo triwec'h bloaz, an hini all pemzeg (hag eben a zo pemzeg)
Zo pell 'zo braz en hirvoud hortoz bezan dimezet (Pell a zo emaint oh en em garoud, hortoz boud dimezet)

Fil d'ar ger ma mignon, lar dezo dond d'an iliz (Fil = galleg file)
Ha me o interrojo war darn ar hatekiz

Pa oa goulet diganto n'anavezent netra (goulet = goulennet)
deuz ar sakramenchou, ar re principala

Filit d'ar ger bugale evid eur bloaz pe zaou
Da hortoz ho-po desket darn ar sakramenchou

Neuze e savas e ziouskoaz, me a gred e sonje
« Eun druez eo », emezañ, « dimezin bugale »

Neuze e tistroent d'ar ger o daou en eur ouelañ
Red e vo deomp emezom doned da studiañ

Red e vo deomp studiañ koulz an deiz evel an noz
Ma n'ouzom ket ar re nevez, ni a zisko ar re goz

Tri pe bevar miz goude e yae an intañvez
Da gavoud an aotrou person da lared dezan taol evez

Peogwir ma merh a zo klanv, eur pennad a zo dija
Kent evid gwellañ, he hleñved ya bepred war wasaad

O zigasit anezo d'an iliz ma vezint unvaniet
Ha setu int bet o-daou dimezet hag eureujet

C'hwi lavaras ar person ho-peus graet din flegañ
Eur vuhez hir hag euruz hetan deoh er bed-mañ.